


# FICHENN METODOLOGIEZH: STUDIAÑ HA DESKRIVAÑ UN ARDREMEZ

## I – KINNIG AN DIELL

1. Doare(natur) an diell
2. Anv ar poltredour(ez)
3. Deziad al luc'hskeudenn
4. Titl ar skeudenn
5. Evit piv eo bet tennet ar skeudenn?
6. Evit piv pe petra eo an diell-mañ?



## II. DESKRIVAÑ AL LUC'HSKEUDENN

### 1. Stumm ar skeudenn: donder an noñv (ar renkoù)

Er renk kentañ e weler ...

En eil renk ez eus....

### Da lâret eo eus ar renk tostañ d'an hini pellañ

### 2. Kornad skeutapout

Gwel a-blom

Gwel a-blaen

Gwel a-veskell

Dont a ra eus ur satellit pe a-rez-douar eo bet tennet....



1. Pelec'h eo bet tennet ar luc'hskeudenn?  
Resisait ar c'hevandir, ar vro hag al lec'h resis

2. Deskrivit an ahel implijet evit tenniñ ar luc'hskeudenn  
Gwel a-blom/ gwel a-blaen/ gwel a-veskell

3. Deskrivit penaos e c'heller tenniñ ar skeudenn  
A-rez douar-diàr un uheleñ-ag ur c'harr-nij- ag ur satellit

4. Implij ur c'heriaoueg resis evit ar verboù: treuzañ, mestroniañ, dont tre (s'avancer) ha ragverboù-lec'hioù: tro-dro, betek, pell, a-dal, war vord, a-dreñv, dirazañ, pelloc'h,

5. Termeniñ an elfennoù naturel: torsennadur, struj, douar...  
Termeniñ an elfennoù mab-den (sokial) annezadur, implij an douar, natur an obererezhioù, dezougenoù...

6. Urzhiañ an deskrivadenn: implij an deskrivadur diàr renkoù pe diàr zonennoù  
Gallout a ran deskrivañ eus ar renk tostañ betek ar renk pellañ.  
Da ziwall: ne ra ket an oabl ur renk Implij

7. Ne roan ket ma sav-poent hiniennel negativel

8. Er fin e c'hellan displegañ an ardremez: evit pep lodenn: perak amañ ?

9. Peseurt ardremez eo? Ardremez-kêr, àr ar maez, naturel, àr ar mor....

### Deskrivadur diàr zonennoù

Ret eo termeniñ ar zonennoù e-diabarzh ar renkoù é lec'hioù anezhe get arouezennoù spisverkoù (iliz, kendi, gwez, hentoù...)

	▲	
●		●

